

## Diskan

Kousk ! kousk ! Breizh Izel  
Bro dispar,  
Setu an noz o tond war an douar,  
Kousk ! Breizh Izel  
Bro ken mad,  
Trouz ar mor braz,  
A zav d'az luskellad.

1.-An heol a zo kuzet,  
Setu echu an deiz,  
Me glev ar c'hloc'h  
O tinal an Ave!

2.-C'hwez vad an ed e bleun,  
Hag al lann alaouret  
War ar meziou  
Gand ar glizh-noz a red.

3.-Ar bastored a gan  
O tastum o loened.  
Gwerziou Breizh-Izel  
N'int ket c'hoazh kollet.

4.-Arvor! O douar sakr !  
A greiz kalon m'ho kar,  
Bro all ken kaer,  
N'euz ket war an douar.

## Refrain

Dors ! Dors ! Bretagne,  
Pays sans pareil !  
Voici la nuit, qui descend sur la terre !  
Dors Bretagne,  
Pays si doux,  
Le bruit de la mer immense  
Monte pour te bercer.

1.-Le soleil s'est couché,  
Voici fini le jour.  
J'entends la cloche  
Qui tinte l'Ave !

2.-La bonne odeur du blé en fleurs,  
Et de l'ajonc d'or,  
Au-dessus des campagnes,  
Se répand avec la rosée.

3.-Les bergers chantent  
En ramassant leurs bêtes.  
Les chants de Bretagne  
Ne sont pas encore perdus.

4.-Arvor, O terre sacrée,  
De tout cœur, je vous aime,  
D'autre pays aussi beau  
N'existe pas sur terre